

Nnn 137

Louarnia

Sell ouzh ar bed en ur mod dishenvel



SOT
GANT **AR C'HOARIOÙ**
VIDEO **P.8**

En niverenn-man :

P.3
PAOTR
LOUARN



P.7

KENSTRIVADEG !



P. 8-11
HAROZED
AR C'HOARIOÙ
VIDEO



P.13
Nageneen

P.14
DANEVELL

P. 15
PESEURT LOEN
VIJES BET EN UR
VUHEZ ALL ?

P. 16
MEURIAO



En niverenn o tont



Louarnig

Mensuel - N°137
du 1^{er} février 2014
5€ an niverenn / 5€ le numéro
60€ ar bloaz / 60€ l'année
Niv. CPPAP : 0514680670

Embannet gant / édité par :
KEIT VIMP BEV 29520 LAZ

Rener an Embann /
Dir de Publication :
Yann-Fañch Jacq, yf.kvb@orange.fr

Kenurzhierer ha maketenn
Coordinatrice et maquettiste :
Camille Argouarc'h,
camille.kvb@orange.fr

Moulet gant / imprimé par :
SOFAG, BP21 - 29590 AR FAOU

Skeudennoù a zo implijet gant
Aotre-Implijout Creative Commons
Dereñ/Kenrannañ

Certaines images utilisées sont
sous licence libre Creative Commons
ou <http://www.photo-libre.fr>
(<http://www.creativecommons.org>)

© creative commons

Embannet gant skoaz
Avec le soutien de



Breizh



PETRA 'NEVEZ ?

Breizh kiss war da skramm !

Bep sul war France 3 Breizh da 11e50 e c'helli
sellout ouzh ur filmig 6 munutenn anezhañ. Kontañ
a ra istor ar familh : ar re vMorzhadeg.
Budog ha Maela a zo daou grennard o vevañ en un
ti bras war ar maez, nepell eus Roazhon, asambles
gant o zad, Loig. Dont a ra mignonez nevez Loig,
Mathilde, da vevañ gant ar familh met ne gomz ket
brezhoneg anezhi. N'eo ket anat an darempredoù ha
Kregiñ a ra ar soubenn da drenkañ... !

Sellet 'teus ouzh un nebeud rannoù ? Plifout a ra dit ?
Pesert tudenn a blij dit ar muiañ ?
Kas da soñjoù deomp hag e vint embannet !


camille.kvb@orange.fr pe Louarnig, 22 grand rue, 29520 LAZ

KONT DA "LIFE" !



Romy « Aet ar maout ganin e kenstrivadeg Bombard Breizh ! »

8 vloaz ^{1/2}



Da 7 vloaz em eus kroget gant ar vombar.

Ezel e oa ma zud eus Bagad Kemper. Eno e ro ma zad kentelioù bombard d'an dud. O welet ma zad o seniñ em boa bet c'hoant klask ober heñvel ha plijet oan bet diouzhtu. N'em boa ket kavet diaes ober gant an añchenn doubl hag aes e teue ar c'hwezhañ ganin. E miz Gwengolo 2012 em boa kemeret perzh e kenstrivadeg bombard Breizh. Seniñ a raen er rummad E : 8 strollad a zeue eus Breizh a-bezh hag e-barzh ma hini e oan ar plac'h nemeti.

Sonet em boa ha bet em boa gourc'hemenoù gant an holl !

Ha TE ! Seniñ a rez ouzh ur benveg ?

Ober a rez sport ? Livañ, tresañ a rez ? Kont deomp kement-se ! Kas ur poltred hag un tamm destenn da camille.kvb@orange.fr pe da Louarnig, 22 grand'rue, 29520 LAZ

KENSTRIVADEG HAIKU E FESTIVAL TAOL KURUN

Aet eo ar maout gant ar varzhoneg mod Bro-Japan-mañ :

"Dindan ar glav
risklañ a ran gant ar velo
flastret eo an touseg."

Skrivet gant Enzo le Quééré, Div Yezh Kemperle,
ha Mael Jaouen, skolaj Lann-er-Stêr.





URRRRG

TOUSSE

MONT A RA ?

MUURK



TOMM EO BET DT.

DROCH EO MONT DA GOURONKAN ER GWILEN D'AR C'HOULZ-SE.



PETRA ZO... MA MASKL !

TENNET 'MEUS ANEZH...



PELEC'H 'MAÑ MA MASKL ?



SI OUL 'TA ! MIROUT A RAE AC'HANOUT A ANALIÑ MAT.



E! GLEB-TEIL EO !

PETRA ZO C'HOAR-VEZET ?

DIT DA LAVAR DIN !
GWELET 'M EUS C'HWI
HO-TAOU O SPLUJAN, HAG
EGILE ALL O TONT WAR-
C'HORRE BUAN A-WALC'H
HA REDEK KUIT.

TE, AVAT, OA
CHOMET ENO.
SETU ON AET
D'AZ KERC'HAT.

TRUGAREKAAT
AC'HANON A
C'HELLEZ OBER,
'MESTRA !

TRUGAREZ.

HE !
DA BELEC'H
E SONJ DIT
MONT
BREMAJ ?

DU-
MAJ.

WAR-DROAD ?
YEN-KI DA
GORF HA
GLOAZET
DA IBIL ?

PET OAD
OUT ?
PEMZEK ?

C'HWEZEK
AOUCH !



SELAOU.
AMAJ 'MAJ
MA C'HARR

HAMA !
LAOSK AC'HANON
DA REIN
SIKOUR DIT !

HMM.
OK



MOAIEN ZO
DEOC'H LAKAAT
AN DOMMEREZ
A-GRENN ?

SED
AZE.

WAR-ZU
SANTEZ-
TEREZ 'TEUS
LARET ?

TE 'LARO DIN
PELEC'H E LAOSKIN
AC'HANOUT. 'MOD-
SE E CHOMO
KEURINUS DA
IDANTELEZH.



OK



GERIOÙ KUZHET AR C'HOARIOÙ VIDEO

T	P	S	S	N	V	W	O	E	U	P	A	E	R	O	U	A	N	T	Z
S	O	J	M	K	O	T	K	J	T	U	D	I	T	K	A	Z	R	L	Z
N	A	G	M	K	O	H	F	I	V	K	O	P	S	G	G	N	M	M	H
G	K	S	D	I	V	J	J	Y	V	K	G	M	E	S	T	R	K	K	A
I	S	I	R	Z	V	A	D	Z	L	B	U	S	W	Y	A	W	O	F	E
N	L	C'	D	I	V	P	I	H	E	U	R	E	U	K	H	I	N	F	D
M	E	H	R	R	V	A	D	A	N	E	R	Z	H	Z	F	K	G	K	R
E	T	O	E	B	V	N	R	O	I	W	T	W	W	B	T	T	F	G	O
V	R	A	I	I	O	D	E	H	N	Y	I	E	K	Y	L	F	F	K	U
U	I	R	S	P	D	V	C'	O	T	G	R	R	I	F	K	K	R	G	K
S	N	I	T	R	N	D	H	G	E	A	P	H	A	R	O	Z	K	D	K
P	P	B	O	I	Y	G	U	F	N	L	L	U	S	J	M	S	U	P	L
T	U	K	R	N	I	O	S	K	D	L	U	Z	I	A	D	E	L	L	E
K	H	R	D	S	F	J	U	G	O	O	A	I	I	K	A	L	N	R	Z
J	S	O	I	E	L	B	W	U	F	U	G	O	R	I	L	H	E	T	E
O	L	K	N	Z	N	J	H	L	K	D	I	V	F	J	R	M	L	K	B
N	N	O	A	M	Y	G	P	S	M	I	S	M	V	H	O	O	F	L	V
K	R	D	L	K	K	W	G	H	G	Z	N	J	O	L	S	K	O	E	D
S	T	I	W	V	K	A	Z	R	B	N	I	A	P	N	W	K	F	S	K
K	S	L	Z	J	P	V	K	S	S	J	P	A	R	F	K	S	E	D	V

- HAROZ
- GALLOUD
- DREISTORDINAL
- DIDREC'HUS
- LETRIN
- C'HOARI
- AEROUANT
- DROUK
- NINTENDO
- SEGA
- NERZH
- PRINSEZ
- SKOED
- LUZIADELL
- KROKODIL
- HEUREUCHIN
- GORILH
- MESTR
- PLOMER
- JAPAN
- KLEZE
- TEIRMEN



RESPONTOÙ

A	D	E	S	K	J	R	V	J	T	S	S	K	A	J	T	Z	T	S	V
N	S	J	M	N	J	V	I	N	R	K	Z	V	K	A	M	I	L	S	
D	E	O	K	S	T	O	T	N	Z	G	H	G	M	K	T	D	K	V	
A	T	J	O	N	A	M	S	I	W	S	J	G	A	M	V	Q	N	N	
N	V	T	W	R	T	J	A	I	Q	H	T	H	T	N	Z	N	K	T	O
Z	V	T	W	R	T	J	A	I	Q	H	T	H	T	N	Z	N	K	T	O
E	T	T	E	L	T	I	Z	N	T	O	V	S	O	I	N	V	K	H	L
T	J	H	S	W	T	S	H	T	H	J	H	G	A	T	D	B	J	J	
K	D	K	O	V	K	A	H	J	H	G	H	D	N	V	I	N	S		
K	G	K	R	E	R	I	G	A	D	O	A	R	D	K	D	N	V	H	
H	K	F	L	A	K	E	I	A	H	N	V	D	O	I	T	V	A		
O	G	T	L	B	M	T	M	I	O	R	A	A	R	V	O	L	E		
N	G	V	Z	H	Z	H	Z	H	Z	H	Z	H	Z	H	Z	H	Z		
N	W	W	N	G	B	S	J	O	K	A	I	F	H	O	K	M	G	N	
Z	T	Z	K	Z	K	T	K	T	K	T	K	T	K	T	K	T	K		
Z	T	Z	K	Z	K	T	K	T	K	T	K	T	K	T	K	T	K		

KENSTRIVADEG !

Lenn gant aked ar reportaj diwar-benn harozed ar c'hoarioù video ha respont d'ar goulenn-mañ :

PETRA EO MICHER MARIO ?

KALVEZ ?

PLOMER ?

LIVOUR ?

Kas ar respont mat deomp dre bostel pr dre lizher (chomlec'hioù er pennad a-us). An hini primañ o respont a ielo ur prof brav gantañ/ganti. Gant ar re all o respont e ielo ur profig all !

HAROZED AR

SOT OMP
GANTO!

MARIO

- Ganet e 1981 e Bro-Japan
- Renet gant Nintendo
- Piv : Plomer eus bro-Italia
- Mignoned : Luigi (breur), Yoshi (mignon gwellañ), Peach ar briñsez, Toad (servijour Peach), Donkey Kong...
- Ar re zrouk : Bowser, Wario, Koopas, Goombas, Bob-omb, Boos, Maskass, Bill Balls...
- Teknikoù dreistordinal : En em dreuzfeurmiñ a ra Mario e traoù a bep seurt

Daoust d'e dres plomer boutin eo Mario kreñv-abominapl hag e c'hell lammat uhel-kenañ. N'eo ket abalamour m'eo bihan ha rontik eo nul Mario : kalonek ha prim eo pa vez oc'h en em gannañ. Setu perzhioù a sikour anezhañ kalzik. Komz a ra saozneg gant ur pouez-mouezh italianeg. Lavar a ra «Here we go*» pe c'hoazh «It's me*, Mario!» Gouest eo d'en em dreuzfurmiñ : o tastum un tog-touseg e c'hell kreskiñ ha bezañ kreñvoc'h. Ma tastum ur vleunienn e c'hell bannañ boulligou-tan evit en em zifenn, ha gant sikour ar steredenn e teu da vezañ didrec'hus* ! Er c'hoari «New Super Mario Bros» (war al letrin* c'hoari Nintendo DS da skouer) e c'hell Mario mont da vras-divent pe da vihan-tout gant tokoù-touseg. E-barzh ar memes c'hoari, war Wii da skouer, e c'hell Mario lakaat gwiskamant un a-rouant a-benn riklañ war ar skorn !

DEUET EO MA-
RIO DA VEZAÑ E
TEIRMENT (3D)
E 1996



« JUMP
C'HOARI
HA DON
198

MA
MIA

GERIAOUEG

«Deomp de'i!» «Me 'ni eo, Mario!»

«Mamma mia!» = «Ma mammig!» en italianeg

Didrec'hus : ne c'hell ket bezañ na c'hloazet, na lazhet.

Letrin c'hoari : ar mekanik e c'hoariez gantañ (Nintendo DS, Playstation 3, Xbox...)

G'HOARIOÙ VIDEO



DONKEY KONG



MAN»
AN MARIO
KEY KONG È
31!

A


PER MARIO
WORLD WE U

Deuet eo ar gorilh war-wel evit ar wech kentañ er c'hoari « *Jumpman* » e lec'h m'eo Cranky Kong, e gwirionez (Tad Donkey Kong). Ar gorilh, gwallgaset* gant e vestr Jumpman (Mario) en deus paket mignonez e vestr, Pauline hec'h anv. Ar c'hoarier a gemer plas Jumpman, ha ar gorilh zo un dudenn drouk d'ar mare-se.

Dont a ra da vezañ unan jentil da vare ar c'hoari « *Donkey Kong Country* », krouet e 1994 war Super Nintendo. Rankout a ra Donkey debriñ bananez evit chom yac'h ha bezañ trec'h war ar c'hrokodil bras ha ferv*, King K. Rool. Ambrouget* e vez

Donkey Kong gant e vignon feal Diddy Kong, bihan ha mibin*. E-barzh an eil c'hoari e rank Dixie Kong, mignonez Diddy, mont da sikour Donkey Kong, paket m'eo bet gant an hini drouk ar wech-mañ.

- Ganet e 1981 e Bro-Japan
- Renet gant Nintendo
- Talvezout a ra Donkey Kong da « Azen Gorilh »
- Kamaladed : Diddy Kong, Dixie Kong, Funky Kong, Cranky Kong...
- An hini drouk : King K. Rool



- Unan gwallgaset : droug vez graet outañ
- Paket : p'eo bet unan bennak tapet ha lakaet da brizonad.
- Trec'hiñ unan bennak : dont a-benn anezhañ goude stourm outañ
- Ul loen ferv : drouk ha didruez
- Ambroug unan bennak : Mont gantañ d'ul lec'h bennak
- Unan mibil : Unan prim

© Donkey Kong Country Tropical Freeze

SONIC AN HEUREUCHIN

- Ganet e 1991 e Bro-Japan.
- Ijinet ha kinniget gant Oshima ha Yasuhara (tresourien) hag an diorroer Yuji Naka (e ti Sega)
- Kamaladed : Tails (Louarn yaouank, daou lost dezhañ), Knuckles (Ekidne* ruz)
- Tud drouk : Aotrou medisin Eggman
- Teknikoù dreistordinal : Krouiñ a ra Sonic un avel-dro evit an argad pe evit mont buan. Gant-se e c'hell ruilhañ, lammat, hag implij skoedoù energiezh e meur a geñver. Botoù « soavon » zo gantañ ivez, setu e c'hell tennañ gounid evit riklañ war tachennoù zo.

«SONIC THE HEDGEHOG 2»



KROUET EO BET AR C'HOARI-MAN E 1992 EVIT AR SEGA MEGADRIVE HA DA HEUL EO BET KINNIGET WAR MEUR A LETRIN' C'HOARI : GAMECUBE, PLAYSTATION 2, 3, XBOX, NINTENDO DS...

Sonic a c'hell redek d'ar pevarlamm betek tizhout tizh ar son, da lavaret betek 1 969,837056 km/e !

PESEURT DOARE HEUREUCHIN EO ?

Gwelet e veze anezhañ e bandennoù-treset ar bloavezhioù 1990 anvet « Comics » (memes reoù ha Paotr-Louarn) e lec'h ma komz rok* ouzh an dud. Daoust da se eo kalonek ha leal*.

Prest eo d'en em lakaat en arvar evit tud didamall*. Ne raket keour ma tle en ober met ken abalamour ma fell dezhañ en ober, tra ken. Ne asant ouzh lezenn ebet.

Bevañ a ra hervez e lezennoù dezhañ e-unan.



AO. MEDISIN EGGMAN



SONIC

DEUET EO SONIC DA VEZAÑ E TEIRMENT* E 2001

TAILS





ZELDA

LINK

- Ganet e 1983 e Bro-Japan
- Ijinet ha kinniget gant Shigeru Miyamoto (e ti Nintendo)
- Mignonez : Zelda
- Tud drouk : Ganondorf dreist-holl, reoù all a-wechoù (levezonet gantañ pe get)
- Teknikoù dreistordinal : ur paotrig ordinal eo Link met kalonek eo ha gouest eo da vestroniañ binvioù hag armoù ispisial, ar c'hleze an hini pouezusañ anezho.

E penn kentañ pep c'hoari e vez dihunet Link gant unan bennak. Ha lezirek e vefe ?

Bep tro e vez goulennet sikour digantañ evit saveteiñ ar bed hag ivez, ingal, ar briñsez, Zelda. Ret eo dezhañ mont da gestell ha da lec'hioù dañjerus da glask war-lerc'h perlezennoù hud a-benn kreñvaat e gleze. Goude-se e vo kreñv a-walc'h evit talañ* ouzh an nerzhioù drouk. Luziadelloù* hag emgannoù a zo evit mont war-raok. Link n'eo ket dre ret memes paotr e pep c'hoari met kentoc'h ene* un haroz a-hed ar bloavezhioù, setu perak e vez gwelet dindan a bep seurt stummoù. Pep c'hoari en deus un aergelc'h ha perzhioù disheñvel.

The Legend of Zelda a oa unan eus c'hoarioù an NES. Ur fiñv-tresadenn skinwel a zeuas er-maez e 1989, berr tout anezhi.

Ur rummad manga zo bet savet diwarnañ ivez.

Testenn gant Geekezig

GERIAOUEG

- Ekidne : seurt ornitorink
- Komz rok : bezañ dichek
- Bezañ leal : pa vez ezhomm anezhañ e respont ingal
- Didamall : taget
- Talañ : en em gavout dirak
- Luziadelloù : pa vez kudennoù da ziskoulmañ.
- Ene : spered un den distag eus e gorf



LINK

SOUBENNARGEK.WORDPRESS.COM

Soubenn ar Geek zo ur blog e brezhoneg e lec'h ma lenner savoù-poent Gwenvred diwar-benn c'hoarioù-video, filmoù pe c'hoazh romantoù pe manga lennet ganti.



SUDOKU



DISOC'HOÙ

1	9	5	3	2	4
4	2	3	1	9	5
6	3	1	5	4	2
5	4	2	6	3	1
2	5	9	4	1	3
3	1	4	2	5	6

3	5	2	1	9	4
1	4	6	3	5	2
5	2	1	4	3	9
6	3	4	5	2	1
4	6	3	2	1	5
4	6	3	2	1	5
3	4	6	5	1	2

	5	2			3
	1				
		6		4	
	4		1		
				2	
4			5	6	

	4	6			
		2	3		
	2		4		
		4		2	
		3	6		
			2	5	

C'hoarzhin !

UR ZERO A GEJ GANT UN EIZH
HAG A LÂR DEZHAÑ :
- MA, LAKAET 'TEUS UR GOURIZ !?

UR VAMM ALUMETEZENN A LÂR D'HE BUGALE A
ZO O VONT DA DREMEN ARNODENNOÙ :
- BEZIT DINEC'H. TREMEN A RAIO MAT AN TRAoù.
HA ZOKEN MA NE YA KET, ARABAT DEOC'H
SKRABAÑ HO PENN.
EWEN

:)) :D XD ^^

Penaos e vez lâret...

**« SALUD,
MAT AR JEU ? »**

e yezh ar sinoù ?



**1) LAR BIZIED
DA ZORN
DEHOÛ HAR
DA VUZELLOÛ**



**2) STAG-OUZH-STAG EO DA
VIZ-YOD HA DA VIZ-MEUR
A ZO, DA VIZ-MEUD A ZO
ASTENNET HAG A RE ALL
PLEGET. FIÑVAL A RA DA
ZAOARN DEUS AN TU DE-
HOUBETER AN TU KLEIZ.**



Naggeneen

SENARIO & TRESADENNOÙ : CHRISTOPHE BABONNEAU

BREZHONEG : G. ARSOUARIC HA Y.F. JACQ



GLOU
GLOU
EEEECH !
TEUH TEUH !



N'EO KET MAT,
GOÛT A OUZON !




« KET MAT » ?
... FALL PUT EO, YA !
HA DEUS SE E VEZ
GRAET « BOURBON
WHISKEY » GANECH ?



PAS ! STAOT-RAZH,
DISLONK, PE LESANVIOÙ
ALL, MET NE REOMP
KET BOURBON ELUS
AN EVAJ-SE.

TANAV E OA BET FRI
BUDDY RED WAR AN
TAOL-MAÑ.

GOÛT A QUIE MAT E VIJE
BET TALVODUS KAOUT
AL UR BRESOUR HAG HINI
UR STRILHOUR GOUDE M'O
DIJE TANVAET UL LOMMIG.



PIGNAT A REAS
NAGGENEEN
WAR AR
BLANKENN-GOAD...



...A-BENN KELAOUIN
AN HOLL EN DOA BET
DOÑJER OUZH AN EVAJ.



EVEL M'EN DEFE C'HOANT
NAGGENEEN BEZAN DILENNET
DA VAER, E TIBUNAS KOMZOÙ
SKLAER DIRAK AN HOLL
O REIN E SOÛS WAR
KALTE AR WHISKEY.



UN HUCHADEG A «YIC'HAAA» A
DARZHAS A-GREIZ-HOLL GOUDE M'EN
DEFE NAGGENEEN PROMETET
KAS AN TRAOÙ WAR-RAOK.

WAR ROUDOÙ TAD-KUÑV



E Kommanna, e Menez Are, e oa Iwan o vevañ. Ar poatr yaouank-se a blije dezhañ ar varzhoniezh hag ar c'han, ken ha ken.

Un nozvezh hañv ma oa o vakañsiñ e ti e dud-kozh e tiskoachas ur c'harnedig brav-eston skrivet gant e dad-kuñv. E foñs ar c'hrignol e oa kuzhet. War e golo e oa skrivet **BARZHONEGOÙ - EISTEDDFOD 1904**. Barzhonegoù e-leizh a oa el levr-se. Gant e dad-kuñv e oant bet dastumet. En un nozvezh e lennas anezhañ.

Goude e oa manet kousket, e spered o nijal, o treizhañ Mor Breizh ha douarañ e bro an Aerouant Ruz. E penn ur gêriadenn iskis en em gavas neuze, dezhi un anv hir eston ha dibosupl da zistagañ : **LLANFAIRPWLLGWYNGYLLGOGERYCHWYRNDROBWLILLANTYSILIOGOGOGOCH**. Un den yaouank a zeuas dezhañ en ur yezh dammanavezet gantañ :

« **NOS DA ! FY ENW I YW IFAN** ».

Gouest eo bet neuze da respont : « **NOZ VAT ! IWAN EO MA ANV** ».

Pebezh souezh ! Daoust m'eo ar wech kentañ dezhañ bezañ e Bro-Gembre eo gouest da gompren un tamm kembraeg.

Pedet e vez Iwan da vont gantañ d'an Eisteddfod a vez dalc'het e Dinbych ha fromet eo ar poatr o vont war roudoù e dad-kuñv. Miliadoù a dud a zo eno evit degemer anezho. A-unvouezh e kanont « **HEN WLAD FY NHADAU** ». An ton-mañ a oa anavezet gant Iwan abaoe ma oa bihan : hini Bro Gozh ma Zadoù eo ! Gouest eo neuze da ganañ gant e vignoned. Re vuan eo tremenet ar mare-hud-mañ, allas. Kan ar c'hog a dennas Iwan eus e hunvre. Ne vern. Sklaer e oa deuet dezhañ e oa poent mont du-hont evit gwir, dastum kanaouennoù ha barzhonegoù evel ma reas gwechall e dad-kuñv.

**KLAS CM
DIWAN KOMMANNA**



NEVEZ!

PROU.A.D

PESEURT LOEN 'VIJES BET ? ? ? EN UR VUHEZ ALL ? ? ?

E-PAD UN ENDERVEZH :

- Plijout a ra dit mont da bourmen da-unan
- ◆ Mont a rez d'ar poull-neuial gant mignoned
- ▲ Mont a rez d'ar c'hoad, da grapat er gwez
- Kregiñ a rez gant ur c'houk-kreisteiz

PESEURT DOARE DEN OUT ?

- ▲ Startijenn a vez ganit bepred !
- Trankil hag hunvreer-ez
- Sioul, c'hoarier-ez, ha stourmer-ez gwechoù all !
- ◆ C'hoarier/ez ha kizidik war un dro

PETRA 'GAVEZ MAT DA ZEBRIÑ ?

- ◆ Pesk ha legumaj
- ▲ Ar frouezh a blij dit kentoc'h
- Sot out gant ar saladenn
- Pesk, kig, produioù dre laezh...

PA VEZEZ TAGET (DRE-GOMZ) GANT UNAN BENNAK, PENAOS E RESPONTEZ ?

- Ne rez ket van, mont a rez kuit trankilig
- Kounnaret out, techet out d'ober poan d'egile/eben.
- ▲ Ober a rez goap ouzh egile/eben.
- ◆ Trist out ha chom a rez en da gorn.

WAR PORZH AR SKOL, PESEURT C'HOARIOÙ A REZ ?

- C'hoari a rez da dapout krog er re all
- Ober a rez traouigoù sioul, redek ne blij ket dit
- ▲ Plijout a ra dit pignat, lammat...
- ◆ Plijet vezez gant an holl c'hoarioù

PESEURT PROFOÙ 'TEUS BET DA VARE NEDELEG ?

- Ur c'hoari strategiezh
- ◆ Ur vell nevez
- Ur c'holc'hed nevez
- ▲ Un trampolin da lakaat er jardrin

DISOC'HOÙ

- Un deflin vijes bet !
AR MUIAN A ◆ 'MEUS BET
- Ur marmouz vijes bet !
AR MUIAN A ▼ 'MEUS BET
- Ur vaot vijes bet !
AR MUIAN A ● 'MEUS BET
- Ur c'hazh, pe ur fellin vijes bet !
AR MUIAN A ■ 'MEUS BET





BRAV EO DIT !


MERSI DIT LAÏLA !

JENTIL EO DA VEZAÑ FARDET AR BERRWISK-MAÑ, AMZER DIN KAOUT MA C'HILT EN-DRO.

E ! AENGUS !



DEUS AMAN DA WELET PIV ZO O KLASK TROUZ GANIT...



O C'HO !

LOENIG-BREIN ! RO SE DIN ! SAC'H LAOU !

SANGLA 2014




CHOP !

AC'HA ! KROGET 'M EUS ENNAÑ !




LAOSK ! LAOSK 'TA !

GRAR !



SHRRRIK !



AOUCH !

AYOU !

AOUCH !

SYPLUM !



MAT EO ! PAKET 'M EUS ANEZHAÑ EN-DRO